

MIROMPA YEC'HED

hor c'hen vroïz

Daoust ha danger zo evit an dud, o veva e kichen eun den klanv gant an drouk-skevent, (poitrinaires?) — Nan, ma karont en em ziuall mad.

Penaoz en em ziuall mad? — An hini klanv a c'holoïo he c'hinou pa en devezo pâz. He vouchouerou-fri a vezo devet, pa o devezo servichet eun dervez. He granch a daolo, n'eo ket var an douar, mez en eur podik, atao en he gichen, hag a vo devet, pe taolet bemdez dre an dour bero. He gambr, ne gousko den ebet enghi, nemethan he-unan. He assiet, he volen, he veren, a vezo, goude bep prod, bervet en dour, ha dastumet en eur pod fer. He zillad sank a vezo bervet en ho part ho-hunan. He di pe e gambr a vezo skubet gant eur valaen karget glepet, evit mirat ne zaole ar boultren en ear.

Pe seurt drouk a ra an alcool d'an den taget gant an drouk-skevent? — An alcool a gustum dinerza kement ar c'horf, ma ñe c'hell mui harpa ouz amprevaned an drouk-skevent.

Petra dle ar c'hlanvour da ober evit en em lakaat e tro da veza pare? — *Chom er meaz*, en avel: an ear yac'h hag an eol a laz amprevaned fall ar c'hlenved. *Dalc'her digor prenezier* an ty, atao, en noz hag en deiz; ha prenezier eur c'hlass pe eur chantier, ugent munut bep tro. *En em vaga* gant boed krenv, ha digemmesk. *En em zalc'her kempenn* atao, dreist peb tra. *En em voalc'hi euz ar penn d'an treid*, gant dour tom, da nebeuta eur vech er zizun. *Goalc'hi he c'houzoug hag he beultrin*, gant dour ien, bemdez. *Mirat da gaout riou*.

Evelse e viro he yec'hed, hag hini he dud hag he amezeien.

POUR LA SANTÉ de nos Concitoyens

Est-il dangereux de vivre ou de travailler auprès d'un tuberculeux ? — Non, s'il prend tous les soins nécessaires.

Quels sont les soins qu'il faut prendre ? — Il faut couvrir la bouche quand on tousse et brûler tous les jours les vieux linges ou gazes qui servent de mouchoirs. Un tuberculeux ne doit jamais cracher par terre mais toujours dans un petit crachoir spécial qu'il devra avoir auprès de lui et qui sera brûlé tous les jours. Un tuberculeux devrait dormir seul dans une chambre à part. Son couvert, son assiette et sa timbale doivent être gardés dans une marmite et après chaque repas être bouillis. Le linge sale du tuberculeux devra être bouilli immédiatement avant d'aller au lavoir. L'habitation d'un tuberculeux doit être nettoyée avec linges et balais humides pour que la poussière ne vole pas.

Quels sont les effets de l'alcoolisme sur la tuberculose ? — L'alcoolisme affaiblit tellement le corps que celui-ci ne résiste plus aux germes.

Que faut-il faire pour entrer en voie de guérison ? — Rester autant que possible au grand air : l'air pur et le soleil tuent les microbes. Ouvrir les fenêtres constamment chez soi, dans la classe ou à l'atelier pendant vingt minutes chaque fois. La nuit, dormir avec fenêtre ouverte. Bonne nourriture simple et fortifiante. La propreté est essentielle. Se laver au complet à l'eau chaude, une fois au moins la semaine et tous les jours se laver le cou et la poitrine à l'eau froide. Ne pas se refroidir.

Et voilà un foyer sauvé, un centre de contagion détruit.